

FICHENN-BOST – Stummer.ez – Kentelioù sizhuniek ENLINENN

AR POST-LABOUR

Anv ar post	Stummer.ez
Natur ar post	Kelenn
Niver a eurvezhioù	18 eurvezh / sizhun
Framm ar post	Kelenn : 9 eurv. / Prientiñ : 7 eurv. / Ambroug-Emstummañ : 2 eurv.
Emglev a-stroll	IDCC 1516 Organismes de Formation
Pazenn	10
Gopr	13,658 € kriz / eurvezh

KEFRIDIOÙ

Kefridi bennañ Stummañ skolidi ar c'hentelioù sizhuniek ENLINENN

Obererezhioù Aozañ an obererezh stummañ (o kenlabourat gant ar skipailh stummerien)

Dindan evezh ha gant harp kenurzhierz ar c'helenn

Prientiñ kentelioù : diouzh ar programm hag ar priziañ, renkañ ur prantad kelenn, aozañ/adimplij dafar pedagogel, diouzh ezhomm ar stajidi

Buheziñ kentelioù / Lakaat ar programm e pleustr

Sevel ha kempenn benvegoù pedagogel diouzh e varregezhioù

Sevel ha kempenn benvegoù priziañ

Titouriñ teulidoù heuliañ an deskarded (bezañs evit pep kentel, levrig heuliañ melestradur/pedagogiezh pep stajiad, egorenn Digiforma pep stajiad)

Derc'hel d'an darempredoù etre ar stajidi ha skipailh SAE (stummerien, melestradur...)

Dastum/sontañ santimant ar stajidi war o stummadur

Titouriñ/brudañ obererezhioù DUDI ha stummadurioù SAE

Kenlabour / Kenbrientiñ / Diellañ

Efedusaat al labour prientiñ ha stabilaat danvez ar c'hentelioù dre labourat gant stummerien all war prantadoù boutin.

Diellañ/rannañ ar c'hentelioù prientet, da liammañ ouzh ar programm

Diellañ/rannañ hag urzhiañ an dafar pedagogel implijet evit pep kentel, da liammañ ouzh ar programm

Kemer perzh en emvodoù ar stummerien ha skipailh + degas mennozhioù da gas war-raok an doare da labourat

Reiñ keloù da genurzhier.ien ar c'helenn hag an hentad stummañ pa vez un dalc'h gant an dafar, an aozañ, ar c'helenn pe gant un deskard

Kemer perzh e buhez ha diorren ar greizenn

Ijinañ pe kemer perzh e raktresoù pedagogel nevez, diouzh ezhomm ar stajidi (KA)

Kemer perzh en emvodoù war ar stummañ aozet war al lec'h labour pe er-maez (KA)

Kemer perzh e foromoù/saloñsoù diouzh an ezhomm (KA)

Kemer perzh en abadennoù hag emgavioù e-lec'h ma vez engouestlet Skol an Emsav, diouzh an ezhomm (KA)

Kemer perzh / sikour da aozañ oberiantizoù nann-gelenn SAE (KA)

Skriv pennadoù evit *#brezhoneg* (KA)

ROLL KENTELIOÙ

A-ZEVRI (stummadur fonnus hibrid) Live 1 : d'ar Meurzh, 18e30-20e00
Live 2 : d'ar Yaou, 18e30-20e00
Live 3 : d'ar Merc'her, 18e30-20e00

Kentelioù sizhuniek 1 eurvezh Live 1 : d'ar Yaou, 12e30-13e30
Live 2 : d'ar Gwener, 12e30-13e30

Kentelioù sizhuniek dre ar saozneg Bloaz 5 : d'ar Merc'her, 17e00-18e30

Kentel souten war ar brezhoneg D'ar Merc'her, 14e00-16e00 (1 wezh / miz)

AOZIOÙ LABOUR

Kelenn 9 eurvezh ar sizhun (dre geidenn)

Kentelioù enlinenn hepken

Kentelioù e-kerzh an deiz

Kentelioù d'abardaez-noz

Pell-labour posubl betek 100% eus an amzer labour.

Eurvezhioù ambroug hag emstummañ e kreizenn Roazhon, er penn-kentañ da vihanañ

Amzer brientiñ 7 eurvezh / sizhun (aozadur da renkañ gant kenurzhierz ar c'helenn)

Emstummañ 2 eurvezh / sizhun (aozadur hag ambroug da renkañ gant kenurzhierz ar c'helenn)

BARREGEZHIOÙ GOULENNET

En h.e aez o teskiñ kelenn ha kenlabourat gant savennoù niverel (klas enlinenn, rannañ teulioù ha mediaoù) : **ur stummadur resis war an ostilhoù hag ar meziantoù labour a vo kinniget gant Skol an Emsav**

Live brezhoneg uhel dre-gomz ha dre-skrid : C1 – live 5 pe Aotreegezh war ar brezhoneg

Diplom / Skiant-prenet war ar c'helenn hag ar bedagogiezh

Anavezout bed ha mont-en-dro ar stummañ evit an dud deuet

Anavezout an hentennoù da gelenn brezhoneg ha da luskañ ur gentel hiziv-an-deiz

Bezañ gouest da verañ e amzer-labour (kelenn er c'hlas, enklask/prientiñ kentelioù, kefridioù all a denn da vont-en-dro ar greizenn stummañ)

Saozneg deuet mat
Aotre-bleniañ B

Ur stummadur a vo kinniget e diabarzh ar greizenn gant kenurzhierz ar bedagogiezh. Ouzhpenn-se e vo harpet hag ambrouget ar stummer nevez gant ar skipailh.

DOARE DEN

En e vleud gant ur strollad tud deuet
Entanet gant ar c'helenn da dud a bep seurt buheziou, raktresoù ha hentoù-micher dezhe
Plijet o kenlabourat gant e geneiled evit prientiñ ha kas ar c'hentelioù
Dedennet gant teknikoù pedagogel liesseurt (o deskiñ, o rannañ gant ar geneiled)
Gouest da labourat en ur mod emren koulz hag a-stroll
Entanet o teskiñ hag o rannañ e ouiziegezh dalc'hmat

EVIT LAKAAT HOC'H ANV

Lizher emginnig + CV da gas da gwenael.dage(@)skolanemsav.bzh
Deiziad termen : d'ar Gwener 17 a viz Genver 2025
Deiziad kregiñ : **an abretañ ar gwellañ**